

Pierre Martin

Gwiskriv (1868) Gourin (1935)

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Eur pegad etre daou gog

KOG SKAER HA KOG GWISKRI

Kog bourh Gwiskri, kog beg an tour,
Troet e veg ouz Kerlabour
Hag e lost war-zu ar Faoued
Diouz kog bourh Skaer en-deus preget¹.
Kog bourh Skaer, 'giz am-eus klevet,
'Vid diskouez eo distagellet,
Da gog bourh Gwiskri, hebdale,
En-deus kaset diouz e zoare².
E-pad e oant-i o chelpad,
Laket o-deus meur a gornad³ :
Gand aon da voud skuiz d'o zelaou,
Ni 'lako eur houblad pe daou⁴.

AR HORNAD⁵ KENTA

Kog Gwiskri a glask lakaad eun tamm buhez e kalon kog skaer

Va mignon paour, a-bell amzer,
N'am-eus ket ho kwelet seder.
Tapet ho-peus 'ta ho tripenn,
Peogwir e kuzit ho klipenn ?
Kejer Konk 'zo gwall lapoused,
Aliez o-deus ho soubet,
Troit ho kein dezo 'ta, komper,
Mar fell deoh 've brao an amzer.
Bemdez, kentiz hag ar mintin,
E klevan hopal en-dro din :
« 'Ma kog bourh Skaer e toull an dour
Hag ar gleb-ni e Kerlabour.
Arsa, Yann baour, d'an diaoul biskoaz !
Deus da wel'd... 'ma er hoalenn⁶ c'hoaz.
Fidoupen ! ya 'had, plomm ha plomm,
« N'om ket prest da gaoud amzer domm.
On tamm segal 'vo ket dornet

¹ preget : prezeget, komzet.

² diouz e zoare : penaoz ema.

³ meur a gornad : meur a gornad butun.

⁴ Ni 'lako eur houblad pe daou : ni vutuno tri pe bevar hornad-butun.

⁵ AR HORNAD : ar hornad-butun.

⁶ er hoalenn : er mervent

Peogwir ar hog ne zikouach ket.
N'ouzon ket kaer petra rafen
Mar degouezfe dezañ diskenn,
'Benn bremañ 'n-eus greet a-walh a zroug
'Vid refan eun tamm gwisk d'e houg. »

Kog Skaer

Arsa, c'hwi a zo eur rever,
'Giz me zegas at gwall-amzer !
C'hwi 'gred pa zellin ouz Gwiskri,
Pa vim-ni on-daou fri-ha-fri,
'Teuio an heol euz an neñvou
Da graza an ed el leuriou ?
Meur a wech am-eus distroet
'Trezeg al leh ez oh kludet
Heb gwel dirag va daoulagad
An amzer glaoureg o vroad.
Ouspenn, selaou 'ta, kement-se⁷,
N'on ket 'vid boud ganeoh bemdez ;
Me am-eus kalz a vignoned,
Tremen outo eo din dleet.
P'am-eus kanet 'hed ar mintin,
Eul lommig dour a ra vad din,
Trei 'ran 'ta euz lenn Rosporden
Pa vez seh-korn va gourlañchenn ;
Rag na vezit ket souezet
Mar troan va hein d'ar Faoued.
Rag ar gwel diouz al lanneier
Ne zistan ket d'am boueleier⁸.
Beb gwech e vez fall an amzer,
Re Wiskri gouez war kog bourh Skaer ;
Tamallet e vez dezañ 'tao
Avel ha grizill, erh ha glao ;
Dre-benn chañs eo uhel pignet,
Pa 'vid-se pell 'zo 've krouget.
Lar d'ho Yann ehan mallozi,
Rag er bed-mañ 'vin ket pell mui :
Ma'z eo gwir ar pezh 'm-eus klevet,
'Raog ar bloaz ne(vez) 'vin er vered.

Kog Gwiskri

M'oh c'hoaz 'ta en dristidigez,

⁷ kement-se : notenn gand an oberoUR : Implijet kalz e Skaer ;

⁸ boueleier : bouzellou.

E-giz ho kavan aliez ;
Kaoud 'rit ar vuhez re bounnar⁹,
'Raog oh deut mad war an douar ?
N'oh ket 'vid pellaad ar maro,
Ha 'n em zalhen, *non d'an dero* !¹⁰
Ya, gar c'hoaz eur zao d'az pragou
Ha jar e stoken d'an Ankou¹¹.

Kog Skaer

Ma ouezfeh pezh a ouzon-me
Ne brezgefeh ket evel-se ;
Gwel'd a rit ar siminal gwenn
Savet tre-ha-tre d'am hichenn ?
Amañ, n'ez eus nemed hennez
Oh ober din kemer enkreuz.

Kog Gwiskri

Penaos e krenit kemend-all
'Raog eur hoz tammig siminal ?
Eun tamm gwrez eur wech an amzer
Ne ra ket re a zroug d'ar hejer,
Dreist-oll war-lerh eun nozvez reo,
Pa vez gwenn-kann o zammig bleo.

Kog Skaer

Ar siminal-se, echuet,
A vo eun tour uhel-meurbed :
Tregont troatad d'an nebeuta
M'her soñj eñ sevel dreist hema¹².
Ar henta jilgog 'vo kavet
War beg ar groaz a vo pintet.
Me 'zo bremañ kalz re zister,
Dre oll ar barrez hen larer ;
Dindan eun nebeud deveziou,
Mall 'vo paka va rabotou¹³,
Mar ne fell ket din boud goapaet
Gand eur geoleg¹⁴ dreist din kludet.

⁹ re bounnar : re bounner.

¹⁰ *non d'an dero ! : en ano an dero !*

¹¹ Ha jar e stoken d'an Ankou : ha serr e stokenn d'an Ankou.

¹² hema : hemañ.

¹³ va rabotou : va zraou.

¹⁴ geoleg : beg-melen.

Kog Gwiskri

Ho tad-koz, 'giz ho-peus kelvet,
'N-oa bet eur maro trist-meurbed ;
Mouget eo bet, eñ 'kreiz e vrud,
Gand eun taol kurun war e glud.
Hennez ha me 'oa daou vignon
E-giz ema on daou Berson.
Bremañ zo tro daou-ugent vloaz,
Din 'n eur ouela eñ a laras :
« N'eo ket heb krena e welan
An arne ker kreñv er vro-mañ ;
Rag mar kendalh da haloupad,
Sur a-walh on da gaodu eur friad :
Mar degouez din koll va hrohenn,
Dalhit tomm d'am heritourien... »
N'oa ket e her peurlavaret,
Pa gouezas d'an traoñ, luduet ;
Ar mein a nije mell-divell
Evel deil gand eur barr-avel ;
Re vourh Skaer 'oa ker strafuillet,
Ken ne ouient peleh sailled ;
Ouspenn hanter-kant a vragou-braz
'Tre d'ar penn daoulin a risklas.
Koll ker fonnuz eur gwir vignon
'Oa evidon eur rann-galon,
Diboaz on war beg tour Gwiskri,
N'am-eus kavet netra ken kri'.
Gwel'd e vab-bihan o tiskenn d'e dro...
Traou a-walh 'vid rei din ar maro.
Ne laoskin hen pilad biken,
Gwell 've din c'hoaz koll va hlipenn !

AN EIL DORNAD

Kog Gwiskri a gemer truez diouz kog bourh Skaer, hen pedi a ra da gemer e blasig war tour Gwiskri.

Kog Gwiskri

Pell 'zo en em welan o kosaad,
Gwall fall e ya va daoulagad ;
Beh am-eus 'vel Roudoualeg.
Menezioù Laz ha re Zant-Wazeg ;
Kaoud lunedou 'kavan iskiz,

Peogwir n'eo ket deut c'hoaz ar giz.
Va diousskouarn ivez 'zo bouzar,
Poent eo din diskenn d'an douar.
Evid eur hoz kogig dister,
Servijet mad am-eus sant Per :
Kant vloaz 'zo on war tour Gwiskri,
C'hoant am-eus d'ober eun diskui'.
Keit-se an neb 'n-eus labouret,
Ne gredan ket laer e retred.
Amañ, pa'z int ganeoh dre fae,
Buan dinijit ahane :
Deut da gemer va flasig-mañ,
C'hwi 'vo c'hoaz ar Roue amañ ;
Gwell eo boud kenta e Gwiskri,
'Vid boud e Skaer an eil pe 'n dri !

Kog Skaer

'Vid da Wiskri n'in ket biken.
Koulz ve din mond da Zant-Turien.
N'eo ket gwelloc'h boud maro c'hoaz
'Vid boud du-ze o tebri hirnaz¹⁵ !
Petra 'lavarfe re an dro ?
Setu ar hog-ni 'mêz ar vro !
Rag Gwiskri, e-giz 'm-eus klevet,
'Mêz ar bed a zo laaket.

Kog Gwiskri

Ehan,, Bastagnez, radoti,
Ha na zisprizit ket Gwiskri ;
N'eo ket ar Pont-Ledan, taol chañs,
A lak 'hanom mêz diouz ar Frañs.
Gand paotred Skaer me 'houl iskuiz¹⁶,
Piou eo an tosta da Bariz ?
D'an tu-ze pa ya an houldi¹⁷,
Trei 'reont o fenn-dreñv da Wiskri ?

Kog Skaer

Mez diouz ar Frañs, ne laran ket,
Me a lavar eo gwall vrudet,
E-giz eur goz broig distro
'Leh n'eus 'med tud hanter-varo¹⁸.

¹⁵ hirnaz : hirnez.

¹⁶ iskuiz : digarez.

¹⁷ an houldi : an evned.

Me, diboaz on war an douar
A zo boazet diouz ar savar,
Da gleved bepred traou nevez,
C'hwi 'wel n'on ket 'vid chañj buhez.

Kog Gwiskri

Mar ne glaskit 'med c'hoariou,
Savar ar bed, nevezentiou,
Ne gredan ket 'rit ho tever
E-giz e tleit hen ober.
C'hwi 'oar pep kog war beg e dour
A dle boud tik d'e bez labour,
Da zell'd a-raog, da zell'd a-dreñv,
Da zell'd e pevar horn an neñv,
Da drei d'an traoñ pa zo sin hlao,
D'ar hreisteiz pa'z a amzer vrao,
D'ar biz a-raog trouz ar gurun,
Hag e-giz-se e-pad ar zun.

Kog Skaer

'Maon keit-se dindan an amzer
Heb gouzoud petra 'm-eus d'ober !
Dre hras Doue boud zo em fenn
Daoulagad mad pa vent war stenn ;
N'eo ket red din lakaad va foan,
E-giz pa vefen o laza tan,
Evid diskouez d'al labourer,
Eñ, vo fall pe mad an amzer :
Kement pluennig a zo em lost
'Oar pebez amzer a ve tost !
Biskoaz on faziet zoken
Kent a zo preget¹⁹ va diskenn,
Kement-se n'eus ket va harzet
Da gaoud plijadur 'bazz ar bed,
Da hoarzin da greñv va bouzellou
Gand Paotred Skaer o lared fentou.

AN DRIVED KORNAD

E Skaer n'eus netra muioh evid e Gwiskri :
kog Skaer a hell chañj klud heb lure.

¹⁸ 'Leh n'eus 'med tud hanter-varo : nasionalist e oa Martin.

¹⁹ preget : prezeget, komzet, lavaret.

Kog Gwiskri

Gwiskri n'eo ket eur vro zaovaj²⁰,
Na kennebeud eun ermitaj :
Amañ, greet ganeoh ho tever,
Ne gaver ket hir an amzer.
Stard eo kaoud eur barrezig vin²¹
(Me a breg bremañ heb c'hoarzin)
Leh zo kement a draou kuriuz
'Vid didui eur hog fentuz.

Kog Skaer

Amañ me wel a-garradou
Tokou moull-hir war ar ruiou,
Kolierou braz gand ar merhed
Ha neud-seiz war brusk ar wazed.
Chupennou lin paotred Wiskri,
Gwildronet²² gand eun tamm neud-kroui²³,
Ha broziou gloan rouz ar merhed
N'o-deus bet din biskoaz plijet.

Kog Gwiskri

Moull-hit amañ ne gaver
Nemed gand Jak-ar-Ramoner,
Pa vez war beg ar siminal
O c'hwitellad hjag o youhal,
'Benn pa fell dezañ kloza piz,
Huzil, lard, anduill ha saosiz²⁴.
N'ho-pesu ket tu 'ta da voud fir²⁵
Evid gwel'd tokou moullou-hir.
Bremañ zo hanter-kant vloaz 'zo
Ne weler ket seiz 'barz ar vro ;
Fichet gand gloan ar maoutig lann,
Merhed ar Skaer a oa ker koant.
Mar ne glaskit 'med bragerez,
N'ho pezit aon dond 'n on touez.
Rag e Gwiskri, en nevez 'zo,
Ar gloan hag al lin 'zo maro ;
Evid ober e-giz re Skaer,

²⁰ vro zaovaj eur vro ouez.

²¹ vin : vihan

²² Gwildronet : kildroennet.

²³ neud-kroui : neud teo.

²⁴ saosiz : silzig.

²⁵ fir = fier.

Pezadou boulouz a brener ;
Biskoaz n'am-eus gwel't kemend-all...
Pep hini 'n-eus e veh da sklinjal²⁶ !

Kog Skaer

Ouspenn, amañ e vez galleg
Ken aliez ha brezoneg ;
Braz ha bihan, yaouank ha koz,
Oll, me 'gred a-walh, ouezont o foz²⁷,
Beteg ar homper Herri Gallig,
P'en-deus lonket e dasadig.
Eur blijadur eo o hleved
El Leurger-foar pa'z int bodet.

Kog Gwiskri

'Vid ar galleg, hanter-dommet,
Hen trohi 'reont a-dreuz a-hed,
Oll e ouezont mad "oui" ha "non"
"Qu'est-ce qu'il veut ?", fout 'ran dioutañ²⁸.
Mar glaskit an tu da hoarzin,
Deut amañ da wel'd ar moh bin,
Lared 'reont 'n eur zevel o fri :
"As-tu trouvé ? - Oh ! oui ! oh ! oui !"
Tregont vloaz 'zo, 'klevan bep sul :
*"Toujours crapaud, jamais crapule !
Bisil, dis prun, prunn c'est breton
Moi sais français, moi Per Bonbon,
Moi grand marchand de Kimperlé,
A tout le monde moi sais parler."*

Kog Skaer

Bep bloaz, da zevez ar Pardon,
E vez e Skaer gand e Varbonn²⁹.
Hennez a zo eul lapous fin :
Gwerza 'ra e-giz per jardin
E ber kloh braz hag e ber koant,
Kaled 'giz mein pa'z a an hañv.
Pez a ray din ar muia keun
E vo dilezel Yann-ar-Hleun ;
Hennez a deu amañ bemnoz

²⁶ sklinjal : da zougen.

²⁷ foz : poz, ; o ger.

²⁸ fout 'ran dioutañ : foeltre kaer a ran dioutañ.

²⁹ e Varbonn : e wreg Marbonn.

Da zaludi e dourig koz,
Ha da riñsal euz ar vered
Ar re 'harz diouzon da gousked.

Kog Gwiskri

Laret³⁰ 'ta, kogig Sant Alen³¹,
Anavoud a rit Madalenn ?
Gwel't ho-peus bet begig he fri ?
Hi 'zo Rouanez bourh Gwiskri.

Kog Skaer

Bep sadorn, ouspenn deg vloaz 'zo,
He gwelan oh ober an dro,
O vond ha dond 'barz an tier,
Kinnig butun da oll re gêr ;
Na pa vez nemed eviti,
Mond a ran ganeoh da Wiskri,
Ya, mond a ran, laret am-eus :
Kenavo deoh³², Yann-ar-Hleuz-Beuz !

AR HORNAD DIWEZA

Eur gwall grokad

Kog Skaer

Pa welan ho klud koulskoude,
'Giz d'eun neizig e-mesk ar gwez,
Gwall dost d'an douar hen kavan ;
Pe oad en-deus d'an nebeutañ ?
Hennez a dle boud kozig-mad,
Ken koz ha marh Laouig Kergoad,
An hini 'lake diou pe deir eur³³
Evid diskenn krog³⁴ ar Vedeur.

Kog Gwiskri

³⁰ Laret ; tregerieg : Larit.

³¹ Alen : Alan.

³² Kenavo deoh : galleg.

³³ eur : eurvez

³⁴ krog : gra.

D'am zad-kuñv, hervez 'm-eus klevet
 Tri-hant vloaz 'zo eo bet savet.
 D'ar penn kenta 'oa uhel-braz,
 `Teir gwech eo bet taolet d'an diaz ;
 Skuiz d'hen sevel ken aliez,
 'Giz eur forn eo greet eun devez
 Diboaz, biskoaz kaouad harnu³⁵
 Euz hini diouzmom 'n-eus greet ludu :
 Pell 'zo braz oll kejer va gouenn
 A zo maro dre gozijenn.
 Mez bremañ pa zo impentet
 Eur metal tra, 'giz 'm-eus klevet,
 'Vid diwall buhez ar hejer ;
 (E ano 'zo *paratonner*)
 An aotrou Person 'zo soñj mad,
 'Raog pell amzer va uhellaad.
 N'eo ket mein na koad a vanko
 Na kirri, nag aon d'o charreo³⁶.
 Na, 'houlfe an Aotrou Person
 Va zavel dreist tour Babilon.
 Lod euz Gwiskri 'deze karet,
 Peogwir 'raog pell 'vo diskaret,
 Degas amañ beg tour koz Skaer,
 Pez 'zo etrezoh hag ar hleier.
 N'her goulter ket evid netra,
 Kinniget o-deus peadra.
 Lod all lare : « Gand nebeutoh,
 Ni 'bo mein kaer euz Toull-ar-Roh.
 Ha na pe goustfe muioh c'hoaz,
 N'eo ket red deom-ni, m'hen ergas³⁷ !
 (Vid sevel eun tour da zant Per
 Mond da glask eur penchell³⁸ da Skaer.
 Paour ha pinvig, hervez e stad,
 Bep sul pep hini lako er plad,
 Hag e-giz-se tour bourh Gwiskri
 Penn ha troad 'vo greet ganim-ni ;
 Ne vo ket hopet er foariou
 E vim o vragal gand restachou ! »

Kog Skaer

Ne gredan ket e vo lesket
 'Tl an all 'giz eur walenn besked,

³⁵ harnu : arnev.

³⁶ nag aon d'o charreo : nag ejen d'o charread.

³⁷ m'hen ergas : sur on, pa laran.

³⁸ penchell : pastell.

Rag, 'giz e lare ar hlaouier
Ma fell da re Skaer kaoud kleier,
Ha klevet mond d'an ofisou,
Laket e vo diouz ar goulou.
Red 'vo kaoud traou en tu bennag,
Rag ar yalh bremañ a zo gwall flak ;
Ar hloh braz a zo gwall-faoutet,
Hag an all pell 'zo 'zo moudet.
'Barz an tour ne³⁹, ganeoh me 'houl,
Lakaad a rent pelennou toull⁴⁰ ?
Mar n'eus 'med koz sent 'n o iliz,
An dra-ze n'eo ket re iskiz :
Pa'z int eet da fabrik Kemper,
Red 'oa kaoud re triweh diner,
Peogwir Mestr ar vasonerien
'N-oa skarzet sakod Sant Alen.

Kog Gwiskri

E Skaer a zo tud pinvidig
E servij Doue birvidig ;
Gwech ebed hini ne ya 'dreñv
Pa dremen plad Roue an Neñv.
En eur ginnig argant dezo
'Vid an tour o-deus da werzo⁴¹.
Biskoaz a zo deut en or penn
Eur zoñj d'ober eun aluzenn.
N'or-beus klasket, ha ne glaskom,
Nemed karantez etrezom,
Kreñvaad bremañ al liammou
'Oa gwechall etre on tadou
Pa yeent-i oll 'trezeg bourh Skaer
Da gaoud ar memez kontroler.
'N eur wel'd o zour koz e Gwiskri,
Re Skaer 've bet tommoh dim-ni,
Ha ni 've eüruz-meurbed
D'o gwel'd ker mad en on andred.
Mez ma'z int-i o klask tabut,
Gell' 'reont diwall ! ni 'zo gwall dud !
Ni 'oar gouren, heb mez ebed,
Diouz ar hreñva euz o faotred :
Biskoaz n'eo gwel't war o frajou
Kein Toupard na kein Nihuellou.
Ouspenn, gouzoud a reom c'hoari

³⁹ ne : nevez.

⁴⁰ Lakaad a rent pelennou toull : Lakaad a rafont kirinou toull.

⁴¹ da werzo : da werza.

Gand on teod ivez e Gwiskri :
Fañch *Amyel* ha *Perig-Fall*⁴²
Ne grenont ket dirag daou all.

Kog Skaer

Bremañ, selaou 'ta, *peoh ha par*⁴³ !
'Tr diou barrez hag en em gar,
Ne deo ket eun nebeudig mein
E tle lakaad kement a zrien.
Evid kreñvaad al liammou
'Oa gwechall etre on tadou,
'Raog pell amzer e vo gwelet
Tour Skaer dreist d'ho iliz savet.
An diou barrez 'hello lared
O-deus kejer uhel pignet,
E-pad ma kano ar hejer,
(Mignoned vraz dre hir amzer)
Gwaz d'an neb a lako beg e fri
'Tre paotred Skaer ha re Wiskri.

*

Ar hloaregig yaouank 'n-eus laket war baper
Ar pezh a zo kouezet euz genaouiou ar hejer,
'N-eus treuzet aliez ar vouillenn hag ar pri
A zo etre bourh Skaer hag etre bourh Gwiskri.
Mignon eo da Zant Per e-giz da zant Alen,
Karoud a ra Yann-ar-Hleun kenkoulz ha Madalenn,
Ha d'ar vignoned vad en-deus en diou barrrez,
Diskouez a ray bepred ar memez karantez.

Gwiskri, dibres⁴⁴ Pask 1892

Notennou e galleg gand an oberour :

- 1) Jean du Cleun-Beuz, mendiant de Skaer. Il a consacré une partie de sa vie à embellir le nouveau cimetière qu'il considère comme sa propriété.
- 2) Madeleine de Saint-Jalmes, mendiante de Guisriff, connue dans le région - Le famille de Saint-Jalmes s'est réfugiée en Basse-Bretagne pour échapper à la

⁴² *Amyel* ha *Perig-Fall* : Notenn, e galleg, gand an oberour : L'excellent barde Gwiskrivit ; François Le May et son jeune ami, l'auteur de cette Dispute.

⁴³ *par* : *sioulder*.

⁴⁴ *dibres* : *vakañsou*.

tyrannie de Cromwel. – La queue-de-rat s'appelle *Boest-Madalenn* dans le pays de Guiwcriff, en souvenir de la compagne inséparable de notre vieille Madeleine.